

# KANNAËDIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 106 Gouhere - Gwengolo 2018 Priz : 3€

## Gouvrezel kêrel e Naoned

E-pad pell, en Emsav, e veze sellet ouzh an enbroerezh evel ouzh ur gudenn a eil renk e Breizh, rak dister e vije bet niver an enbroidi en hor bro. Gwir e oa ar saviad-se tregont, pergont vloaz 'zo marteze, ha c'hoazh e oa sur-mat leiantet<sup>1</sup> an niver evit emblegañ<sup>2</sup> d'ar “politically correct”, hogen hiziv, pa weler an darvoudoù a c'hoarvez

e kêrioù bras Breizh : Naoned, Roazhon, Brest, An Oriant, Kemper... darvoudoù grevus liammet gant an enbroerezh, e welomp mat n'eo ket ur gudenn a eil renk, hag ar pezh a oa da gentañ e bannlevioù ar c'hêrioù bras gall, Paris, Lyon, Marseille, Lille... a zo bremañ e Breizh en he c'hêrioù brasañ :

Roazhon, Naoned, Brest, Gwened... ha zoken e kêrioù bihanoc'h, rak atav e vez an hevelep argerzh : pa-z eo leun al lestr e tic'hlann ar pezh a zo e-barzh hag en em strew pelloc'h.

Tarzhet ez eus ur gwir gouvrezel<sup>3</sup> kêrel e Naoned e derou miz Gouhere 2018, war-lerc'h darvoudoù liammet penn-da-benn gant an enbroerezh afrikat. Da geñver ur c'hontroll gant ar gêreizh<sup>4</sup> en unan eus bannlevioù, anvet kizidik, eus Naoned, ez eo bet harzet ur c'harr bleinet gant un Afrikad, Aboubakar Fofana. Klask a oa war an den-se a-berzh ur

penngêreizhva<sup>5</sup> eus rannvro Paris, evit meur a abeg : laeradennoù, gwerzh drammoù, torradennoù d'an dezveg-vleniañ<sup>6</sup>, hag all... da lavarout eo e oa ur feller<sup>7</sup> liesadfeilher<sup>8</sup>, ha neket an hini yaouank “lambda”, divlamm, mac'homet gant ar gêreizh dre ma oa ur “Black” bennak hepken, evel m'o deus skrivet

an darn vrasañ eus ar c'helaouennoù. Ne felle ket dezhañ bezañ kontrollet rak gouzout a ouie ar pezh a c'hortoze anezhañ peogwir e oa klask warnañ gant ar gêreizh. Sailhet en deus war ar c'herreizhourion o vont war-dreñv gant e garr. Unan eus ar

c'herreizhourion en deus kemeret e bistolenn ha tennet war ar feller ouzh e dizhout er gouzoug ha marvet eo ar feller war-lerc'h an taol pistolenn-se.

Kerkent ez eo bet enaouet an tangwall en holl bannlevioù kizidik Naoned : Breil-Malville, Malakoff, Dervallières, Bellevue... Lakaet eo bet an tan e-barzh meur a gantad kirri e kerzh ur sizhunvezh gouvrezel, tangwallet eo bet zoken karr Johanna Rolland, Maerez Naoned, hi hag a oa bet ken brokus o reiñ skorennoù arc'hant d'ar c'harterioù kizidik-se evit kaout ar peoc'h sokial, evel ma rae he diagentour Jean-Marc

<sup>1</sup> Leiantet : *minoré*.

<sup>2</sup> Emblegañ : *se soumettre volontairement*

<sup>3</sup> Gouvrezel : *guérilla*.

<sup>4</sup> Kêreizh : *police*.

<sup>5</sup> Penngêreizhva : *commissariat de police*.

<sup>6</sup> Dezveg-vleinan : *code de la route*.

<sup>7</sup> Feller : *un délinquant*

<sup>8</sup> Liesadfeilher : *multirécidiviste*.

Ayrault. Tangwallet eo bet ivez al levraoueg er c’harter Malakoff, devet eo bet an holl levrioù, a oa holl e galleg evel-just : pebezh arouez evit ar *Francophonie* !

Kroget en deus an tangwall, ar gwasterezh, hervez ur raktres bepred heñvel, arroutet mat, evel hon eus bet seulabred gant an afer Theo e rannvro Paris, ha meur a lec’h all e bannlevioù kêrioù bras gall, hag heñvel ivez en Amerika evel e Ferguson er Missouri e miz Eost 2014. Diaes-kenañ eo evit ar gêreizh lakaat harz war ur feller afrikat en unan eus ar c’heodedoù annezet hepken gant ur boblañs afrikat enbroet. Feller pe get ez eo un ezel eus ar gumuniezh afrikat ha neuze da zifenn a-enep ar gêreizh, hag evit un “hini yaouank” a fell da gêreizhourion lakaat harz warnañ er straed e tegouezh kerkent etre dek ha pemzek re “yaouank” eveltañ evit kunujenniñ paotred an urzh ha skeiñ warno. Lezennoù ar Republik c’hall n’int ket evito, Gallaoued ez int nemet evit degemer arc’hant skorennoù ar Stad. Kreñvaet eo bet ar saviad-se e Naoned gant politikerezh ar maer kozh Jean-Marc Ayrault, a oa a-du penn-da-benn gant politikerezh ar geuzidigezh<sup>9</sup> e keñver ar sklavelezh, m’o dije paramantourion Naoned graet o fortun o kas, gant o bigi, sklaved afrikat da Amerika. E-barzh kastell Duged Breizh e Naoned e oa gwechall ur “Mirdi Breizhek”, pa-z eo bet nevesaet ar c’hastell, ne oa mui anv eus Mirdi breizhek, met eus “Mirdi Naoned” e-lec’h ma ne vez mui anv eus Breizh. Bez’ e komzer ennañ eus Anna Vreizh evel-just, diaes e oa ober hep komz anezhi peogwir ez eo bet ganet er c’hastell-se, hogen ar pezh a verkomp dreist-holl ez eo plas bras istor ar sklavelezh er mirdi nevez, mennet gant Maer Naoned. War daou solieradur da vihanañ e vez diskouezet deoc’h petra e oa kenwerzh euzhus paramantourion Naoned. Ne vez ket diskouezet e oa ar sklavelezh, da gentañ, afer ar meuriadoù afrikat a yae da skrapat sklaved er meuriadoù all enebet dezho, hag o gwerzhe war ur marc’had a oa a-raok d’ar baramantourion naonedat dont war ar nevid-se. Keal ebet, evel-just, da gomz eus ar sklavelezh pleustret gant an Arabiz war rann dehou Afrika, ma oa skrapet miliadoù a sklaved bep bloaz ganto abaoe kantvedoù, ma varve darn anezho rediet da vont war droad, chadennet, war-zu Arabia ha broioù all ar Reter Krenn ; ouzhpenn-se e veze spazhet ar sklaved-se, ar pezh a rae da

veur a hini mervel war-lerc’h an oberatadenn-mañ. En Amerika ne oa ket spazhet ar sklaved setu perak o deus bet milionoù a ziskennidi. Met tavet e vez war an dra-se. Ne fell ket din lavarout ez eo aet holl enbroidi afrikat Naoned da weladenniñ Mirdi Naoned evit ober o mennozh war ar sklavelezh, met trawalc’h a dud, dreist-holl eus an tu kleiz, a zo aze evit kenteliañ an enbroidi afrikat a-zivout roll an dud wenn en afer-se. Just a-walc’h ez eo bet gwelet kleizelourion, eus ar re anvet “*anti-fa*” o kuzuliañ ar gabaduilherion er c’harterioù emsavet.

### **Louzoù diboaniañ ar melldroad**

Hag a-benn ur sizhun eo bet mouget an tangwall, kregiñ a rae “Kib-bed ar Melldroad” e Rusia, ret e oa skorañ skipailh Bro-C’hall, ma oa ennañ muioc’h a Afrikiz eget a C’hallaoued : 16 war 23, hervez ar pezh am eus lennet. Ur gelaouenn eus Burkina Fasso, o vezañ ma oa bet skarzhet eus ar c’hoari holl skipailhoù ar broioù afrikat, he deus skrivet e chome memestra ur skipailh afrikat er gevezadeg : hini Bro-C’hall e oa ! Bez’ ez eus bet betek Barack Obama, aet da Su-Afrika evit lidañ kantved ganedigezh Nelson Mandela, en deus diskleriet e Johannesburg ne wele ket kalz a C’hallianed e skipailh melldroad gall, hag edo ar gwir gantañ. “Ar re c’hlaez” evel ma-z eo boazet paotred ar meziennoù da envel “skipailh Bro-C’hall ar melldroad” o deus gounezet “Kib-bed ar melldroad”, ret e oa ober dezho un degemer a zoare ken e oa poblañs Bro-c’hall aet e breskenn gant ar c’heloù-se. Ya ! Un degemer mat o deus bet ar velldroaderion-trec’h war ar “*Champs-Élysée*” e Paris, met un degemer giz ar bannlevioù afrikat, rak follentez divuzul ar C’hallaoued skodeget ha dallet gant an trec’h-se a ra dezho ne welont ket ar pezh a zo bet delanket<sup>10</sup> e touez poblañs afrikat ar bannlevioù pariziat. A-drugarez dezho, d’o breudeur, e oa bet gounezet ar gib melldroad-se ; gant pep melldroader e oa bet prometet 350.000 €mar bijent bet trec’h, ha ganto ? Netra ! O-unan o deus adreizhet an traoù, preizhet eo bet ganto stalioù a lorc’h war vali ar “*Champs Élysée*”. Gwelet hon eus Afrikiz yaouank o freuzañ talwerennoù ar stalioù a-daolioù treid, ha war-lerc’h, kuitaat ar stalioù-se gant skingomzerioù en o zivvrec’h, pe en ur stal all, o kas ganto skaouterioù. Ha ne gomzan ket eus an tagadennoù revel bet gouzañvet gant ar

<sup>9</sup> Keuzidigezh : *repentance*.

<sup>10</sup> Delanket : *déclanché*.

merc'hed, dreist-holl en takadoù anvet “*fan-zone*”. Evit ar meziennoù ne oa nemet darvoudoùigoù dister, arabat e oa mazaouiñ ar gouel. Ar pep drochañ am eus gwelet en diskiantegezh c'hall-se, ez eo ul luc'hskeudenn a zo bet tennet hag embannet er c'helaouennoù, a oa ur plac'h wenn trelatet oc'h hejañ a-us d'he fenn gant he divvrec'h ur skritell ma oa skrivet warni “*Mbappé épouse-moi*”. Lenin a lavare e oa ar relijion “opiom ar bobl”, krediñ a ran ez eo hiziv “ar sport” ha da gentañ-penn ar melldroad a zo deuet da vezañ “opiom ar bobl”, hag a ra da veur a hini alfoiñ<sup>11</sup>. An daou zarvoud-mañ : kabaduilhoù Naoned ha kabaduilhoù ar *Champs Elisée*, a ziskouez digembezusted<sup>12</sup> an Europiz hag an Afrikiz da vevañ a-gevret, ha dre heulret ar mallusted ma-z eus da skarzhañ an holl renerion-stad a gav mat se hag a zo a-du gant alouberezh Europa dre ur maread Afrikiz diziwezh, ha ne hañval ket mont da hesk pa weler un toullad ONGoù sponsoret gant bedelourion evel ar miliardder Georges Soros, fredañ bigi (gwelout afer an *Aquarius*) evit seveniñ dezougen an dreuztiriaded etre Libia hag Europa, ha rener-stad ebet eus Kornog-Europa, er-maez Matteo Salvini en Italia, ha gouarnamant Malta, mennet ober d'an alouberezh-se paouez.

### **Roll noazhus ha diatebek<sup>13</sup> an ONGoù er Mor Kreizdouarel**

Diskouezet e vez, gant ar meziennoù, alouberezh Europa gant Afrikiz evel un doare naturel da skoazellañ tud en argoll e kreiz ar Mor Kreizdouarel hag e vefe reizh d'o skoazellañ hervez “gwir etrevroadel an dud a vor”. Gevier penn-da-benn eo asantiñ d'an anvadur-se, ur c'hwiberezh penn-da-benn eo an dra-se. Ouzhpenn-se ez eo bet haeret<sup>14</sup> gant ar meziennoù e-kerzh ar mizioù Gouhere - Eost hag adlavaret meur a wech, evit ober mezh d'an Europiz, ez eus bet 1500 den o deus kollet o buhez o klask treuziñ ar mor Kreizdouarel abaoe derou ar bloaz 2018. O klevout an dra-se e soñjen-me kentoc'h en 220.000 bugel sioc'hanet bep bloaz e Bro-C'hall ha kement-all e broioù all Europa, evit ober plas d'an alouberion-se. N'eus ket a “wir etrevroadel” da zougen bri dezhañ en afer-se, hag aes eo henn prouiñ. Kemeromp ur skouer eeun : ur vag o kas

<sup>11</sup> Alfoiñ : *délirer*.

<sup>12</sup> Digembezusted : *incompatibilité*.

<sup>13</sup> Diatabek : *irresponsable*.

<sup>14</sup> Haeriñ : *affirmer, soutenir*.

touristed eus Konk-Leon da Enez Eusa, e kreiz ar Fromveur e ra peñse ar vag ha beuzet eo meur a zen. Petra a vo graet war-lerc'h ar marvantr-se ? Klasket e vo piv a zo kiriek eus ar gwallreuz-se, perak eo bet lezet da vont ar vag-se ha ne oa ket e ratre vat, hag evel-just e vo graet prosez ouzh perc'henn ar vag evit digoll tiegezhioù an dud marvet er peñse, evel ma vez klasket hiziv atebegezhioù<sup>15</sup> evit an dud bet lazhet gant kouezhadenn pont Genova en Italia. Heñvel eo evit an dreuztiriaded kaset gant tremenerion eus ur Mafia, salafist pe get, war bigi bresk, diazas, war-lerc'h bezañ paeet 3000 euro dre zen, evit treuziñ ar Mor Kreizdouarel. Piv a vo kiriek ma-z a d'ar strad ar bigi bresk-se ha beuzet an dud sammet warno, mar n'eo ket an dremenerion. Den ne soñj da ober prosez dezho ? Hag an ONGoù sponsoret gant ar vedelourion hag a c'hortoz pellgomzadennoù Mafia an dremenerion da zont diouzhtu da atoriñ<sup>16</sup> an dud karget war bigi diazas evit treuziñ ar mor a zo ken kiriek all. Proseziñ a c'hellfe bezañ graet outo. Gouezet eo an holl draoù-se gant hor renerion-stad, hogen ober a reont skouarn vouzar d'ar pezh a zo ken anat evit an holl, hag a zo diougan ur gwallreuz spontus da zont evit Europa a-bezh. Ar peb tristidikañ evit ur C'hristen kredus ez eo gwelout emzalc'h penn an Iliz katolik, a zo forzh penaos un aotrouniezh divezel<sup>17</sup>, dont da vezañ ur bedelour touet, hag o prezeg dizehan evit ma vefe degemeret atav muioc'h a dreuztiriaded afrikat en Europa, ha gant an eskibion a zo a-du gantañ forzh penaos, lakaet er-maez un nebeut anezho memestra evel an Aotrou 'n eskob Athanasius Schneider, is-eskob Astana e Kazac'hstan, a-orin alaman, ez a al lavar bergoliat, gant ar veleion, betek an disterañ eus ar parrezioù plouezel. Diskuilh a ra an Eskob Schneider, en un dazaters d'ar gelaouenn italiat *Il Giornale*, eus ar 27 Mezheven, ez eo alouberezh Europa gant pobloù afrikat pe aziat, ur raklun aozet ha prientet abaoe pell gant ar galloudezhioù etrevroadel evit kemmanñ penn-da-benn hennadelezh kristen ha broadel ar pobloù europat. Arverañ a ra ar galloudezhioù-se barregezh divezel dirveur<sup>18</sup> an Iliz hag he

<sup>15</sup> Atebegezh : *responsabilité*.

<sup>16</sup> Atoriñ : *recupérer*.

<sup>17</sup> Divezel : *morale*.

<sup>18</sup> Dirveur : *énorme*.

frammadurioù evit tizhout gwelloc'h o amkanioù<sup>19</sup> enep-kristen hag enep-europat.

Itron-Varia ar *Salette* he doa hor gouzavet : “*Dont a raio Roma da vezañ Sez an Antekrist*”.

<sup>19</sup> Amkan : *objectif*.

Lavaret he deus ivez e vo un “disivoud bras” en Iliz katolik ; gant mennozhioù Mattheo Salvini enebet ouzh re ar Pab hag ar bobl en entremar, e c'hellfe c'hoarvezout an dra-se a-benn nemeur.

**Donwal Gwenvenez**

## Madoberoù an Harz

Meur a zoare harz a zo. Harzoù fetis, harzoù difetis. Harzoù yezhel, harzoù etre emzalc'hioù ha temzoù-spered an dud. An holl anezho avat o deus perzhioù boutin : naturel ez int, ha pa vefent krouet gant dorn an den, rak an den e-unan zo ur boud naturel ha kement a ra a zo naturel. Hag ivez, an holl harzoù o deus ur pouezusted hag ur plas war hon douar. An harz a zo ar pezh a ziforc'h pep hini diouzh ar re all, pep tra diouzh an traoù all, a-drugarez d'an harz eo ez eus disheñvelderioù. An harz a zo ar sevended etre daou zen : te zo te, evel m'emaout, el lec'h m'emaout, en doare ma 'z out bet graet, ha me zo me, evel m'emaon, el lec'h m'emaon, en doare ma 'z on bet graet. Ha ma 'z omp disheñvel ne viro ket ouzhimp en em glevout etrezomp dre ret. Atav e c'hellimp, mar karomp, klask en em glevout war dachenoù boutin eus hor preder, en em unaniñ evit diraez ur pal boutin, hag a hent all en devo atav pep hini ar gwir na gemer perzh gant egile, pa chom dieub, pa 'z eo evel m'emañ, ha pa 'z eus un harz etrezomp hon diforc'h hag a fell deomp mirout, a-benn mirout hor personelezh deomp hag hor madoù deomp.

Setu eta petra eo an harz evidomp, ha setu dres ar pezh a ra diouer kement etre Bro-C'hall ha Breizh, hervezomp. Harzoù a zo bet gwechall etre hon div vro, hag hiziv an deiz e hañval deomp e vefe steuziet an harzoù-se, bet gwallgaset da gentañ, distrujet da c'houde, hag ankounac'haet en diwezh. A zo gwir, un harz yezhel a zo bet betek n'eus ket ken pell 'zo etre tachennva ar yezh vrezhonek hag hini ar yezh c'hallek. Pelloc'h 'zo en amzer dremenet, e oa eus Marzoù Breizh, un harz milourel ha politikel e oa. Gant an daou harz-se bet kollet ganeomp, yezhel ha politikel, e oa bodet da neuze ar peadra zo ret da ziforc'hañ ur vro diouzh unan all. Gwechall e oa Breizh ur vro, dre ma vezemp diforc'het gant hon amezek gall er Reter, hag hon amezek saoz tra-mor en Hanternoz. Evel en goar pep unan, kaset da

netra eo bet an harzoù kaer-se dre abeg drouklabour ar C'hallaoued c'halloudus hed ha hed ar c'hantvedoù, ha deuet int a-benn d'hon heñvelekaat outo. Ur mantr, un dismantr, ur gwalleur, hon dizenor brasañ evel Pobl eo. Sujet omp bet ha dre-se n'hon eus ket mui ar gwir, rak n'hon eus ket mui ar galloud, da vezañ anvet Brezhoned evel ar bobl dishual a oa ac'hanomp gwechall.

Petra ober eus hor gwalleur neuze ? Petra a vennomp ober evit disammañ hor speredoù diouzh ar pouez pounner-se chouket warnomp abaoe ken pell ? Bezomp onest ha komzomp fraezh. Evel Brezhoned yac'h ma 'z omp, evel tud emskiantek eus hor stad izel a-vremañ, evel merien galonek dirak al labour ret ober pa vez distrujet o merieneg, ez eomp da adkrouiñ ar pezh a oa deomp hag a zo bet kaset da netra gant ar Gall. Ez eomp da adkrouiñ an harzoù a oa etre Breizh ha Bro-C'hall gwechall, evit gallout bezañ Brezhoned hep muiken, unanet endro d'ur yezh ha d'ur banniel, renet gant ur varnerezh vrezhon dizalc'h hag ur melestradur brezhon nevez, en ur ger, gant ur gouarnamant brezhon dieub, dezhañ e lezennoù. Evit bezañ anvet Brezhoned a-nevez hon eus ezhomm d'en em zizober diouzh ar vezañs c'hall a zo e Breizh ha n'eo ket bet pedet biskoazh ganeomp. Evit seveniñ al labour-se hon eus ezhomm da grouiñ hol lezennoù evito da gemer plas al lezennoù gall. Evel-se e vo un harz en dazont etre lezennoù hor gouarnamant ha lezennoù ar gouarnamant gall. Ezhomm hon eus da ledanaat implij hor yezh, da astenn he implij da Vreizh a-bezh eviti da gemer plas ar galleg, evel-se hepken e vo un harz nevez etre tachennva nevez ar brezhoneg (war Vreizh a-bezh) ha tachennva ar galleg (Bro-C'hall ha broioù all er bed). Adkrouiñ an harzoù evit adkrouiñ hor frankiz, setu penaos e teuo Breizh da vezañ dieub. Setu ar pezh a vennomp ober.

An harz evidomp neuze a zo frankiz personelezh an Den, pe ar Vro. A-drugarez d'an

harz hepken e c'hall bezañ ha chom ar pezh eo, en ur vezañ dizalc'h bepred. Komzomp bremañ diwar-benn an harz fetis a c'hellfe bezañ etre Breizh ha Bro-C'hall, eleze al linenn a ya eus Menez sant-Mikael-ar-Mor da Vachikoul e tu Breizh, hag eus Beauvoir da vBouin e tu Bro-C'hall. An harz politikel, milourel, n'eo ket ul linenn o virout ouzh ar monedone da vezañ dre ret. Da gentañ-penn, ez eo kontrollerezh an dud a dremen an harz etre an div vro. Brezhoned an harz a vo aotreet marteze da vont da labourat e Bro-C'hall, ha marteze e aotreimp-ni Gallaoued an harz da zont da labourat e Breizh. Ar re-se o devo da skouer ur gartenn aotre-labour da ziskouez d'ar valtouterien vrezhon er valtouterezh. Goude ez eus an douristed a zeuio ingal da Vreizh hag a resevo un taol tapon war o zremen-hent ouzh o aotren da chom e Breizh e-pad tri miz d'ar muiañ-holl, da skouer. Ar pep pouezusañ a rankit kompren hiziv gant an destenn-mañ, ez eo ar c'hontrollerezh a vo e Breizh. Ne fell ket mui deomp e vefe Breizh ur vro sujet ha digor d'ar seizh avel evel ma 'z eo abaoe kantvedoù. Evit seveniñ ar raktres-se, evit bezañ mestr war hor gounidoù, hon interestoù broadel, hon eus ezhomm eus ul lu brezhon, soudarded, milourien, evit derc'hel an harzoù douaroniel, ar valtouterezh, ar porzhioù, an aerborzhioù. Difennerzh kentañ gounidoù ar stad hag ar bobl eo al lu.

Daoust hag un urzh a vefe evit seveniñ hor mennad ? Brezhonekaat ar vro da gentañ a lavar lod, krouiñ ar gouarnamant a-raok, gant ar riskl dañjerus e vefe galleger, ha neuze e strinko dioutañ ur vuhez velestradurel gallek, hep krouiñ an harz yezhel hon eus ezhomm etrezomp hag hon enebour. Pe c'hoazh, krouiñ diouzhtu-dak al lu brezhon evit stourm ouzh al lu gall, a-benn tizhout krouidigezh takadoù brezhon dieub dre-holl er vro. Me a soñj din e rankomp stourm war bep tachenn a-benn bremañ. Brezhonekaat, brezelekaat, ha kenlabourat da sevel ar gouarnamant brezhon. Rak gwir eo e c'hall bezañ ur spered *breton* hep bezañ brezhoneg. N'eo ket ur spered *brezhon* siwazh, hogen ar Vretoned a zo gouest da stourm gant ar Vrezhoned ha ne rankomp ket nac'hañ o dorn. Ar re-se a c'hall oberiañ evit Breizh adalek hiziv ha bezañ brezhonekaet en dazont hepken. Ar pep pouezusañ evit deraouiñ ar stourm evit an dieubidigezh vroadel a zo bezañ a-du gant ar mennad broadel hollek. Ken e soñj ganin, evit klozañ, n'eus ket un urzh rekis

da heuliañ evit dieubiñ Breizh. Da bep den e varregezh, da bep den e dachenn labour evit Breizh Vroadel hag an dazont klodus. Ar pezh a rank bezañ atav a zo un unaniezh hollek war-du ar pal buket, ha pontoù ha treuzelloù etre ar strolladoù hag ar skipailhoù oberiant. Ar pezh a glask ober an *emsav* eo e gwirionez. Strolladoù evel «Kevre Breizh» a glask, dres, unaniñ ar Vrezhoned hag ar Vretoned «a-du gant Breizh». Siwazh, tud «Kevre Breizh» ez-resis n'int ket speredek a-walc'h evit kenlabourat ha souten «Adsav» da skouer, war zigarez e vefe eus an tu dehoù-pellañ. Gwashaat fazi ! Petra vern deomp bezañ eus an tu kleiz pe eus an tu dehoù, gant ma vimp Brezhon a-enep da Vro-C'hall ! An harzoù (pa gomzer eus harzoù just a-walc'h) hon disrann a rank bezañ lakaet a-gostez betek deiz an trec'h broadel, ar muiañ ma c'hellomp. Evel-just, gouzout a ouzon ez eo un dra hogos dibosupl, hogen hon uhelvennad a ranko atav bezañ an unaniezh vrezhon. Rak en unaniezh ez eus ar c'hempouez, ha neuze ar padusted evit ar Stad vrezhon da zont. Roll ar stad ne vo bizviken netra estreget difenn ar brasañ niver a Vrezhoned, ha neket kealiadurezh ur bihanniver, gant ar riskl ne badfe ket pell ken. Arabat bezañ nay kennebeut, ha pep hini a oar mat ez omp-ni, ar vroadelourion, eus an tu dehoù. Hogen hor gwir eo, hor gwirionez, hon harz gant an tu-kleiz, ar pezh hol lak da vezañ, hag hor mennad. Karout a rafemp e vefe trec'h mennozhioù an tu dehoù er gevredigezh vrezhon war sevel, tro hon eus bet d'en lavarout c'hoazh. Hogen soñjal a ra deomp bezañ speredek ha fur, ar furnez da vezañ un dalvoudegezh eus an tu dehoù. Ha digor e vimp-ni atav evit eskemm ha kenlabourat gant an tu brezhon eneb, evit kempouez ha mad ar vro. Un harz a zo etre hor mennozhioù ha reoù an tu eneb, an harz-se a rank chom – n'eus forzh penaos ne c'hall ket bezañ kaset da netra – hogen an harz-se ne viro ket ouzhimp a vezañ digor.

Heñvel e vo gant an harzoù milourel etre Breizh hag ar bed. Bez' e vo anezho, evit ma vo eus Breizh, hogen ne c'hallint ket mirout ouzh ar bed da zont da Vreizh ha Breizh da zont d'ar bed. Gant ma vo doujañs ouzhimp, gant m'hor bo doujañs ouzh ar bed arallvro. An harz milourel goude, evel un tad, evel an aotrouniezh, a vo gouest hag e roll e vo pa vo dav, da vezañ kreñv, da c'hourdrouziñ, da nac'hañ. Hon harz a nac'ho atav ouzh al lu gall da zont e Breizh. Hon harz a nac'ho atav ouzh ar

saozneg d'ober e doull er vro. Hon harz a nac'ho atav ouzh ar miliadoù a Afrikaned divroet da aloubiñ takadoù eus hor bro. Breizh a zo Breizh. Ur Brezhon a zo ur Brezhon. *Dura lex, sed lex ! Kalet al lezenn, ret al lezenn !* Diouzh an urzh e teu ar peoc'h, ha diouzh an urzh brezhon ar peoc'h brezhon.

En ur pennad all anvet “Tennañ awen diouzh ar berzh” e skriven e vefe spletusoc'h d'an emsav brezhon sellout ouzh broioù bras ar bed, ar re a-vremañ koulz hag ar re dremenet, evit kemer awen, e-lec'h koll amzer o sellout ouzh an is-broioù ha n'int ket dizalc'h zoken, evel Korsika, Flandrez pe Kembre. Ar broioù bras a zesk deomp elfennoù talvoudus e krouidigezh ur vroad kreñv, unan hag a lako da vleuniañ ur sevenadurezh vras da skouer. Evit an harzoù, sellomp skouer an Impalaeriezh roman a voe unan eus ar re gentañ o sevel harzoù splann etre an douaroù kontrollet ganti hag ar broioù all, anvet barbar. Evel-se he deus gallet mirout ouzh ar re all da zont tre a vil vern enni n'eus forzh penaos, ha lakaat da vleuniañ ar sevenadur latin dre-holl. Yezh latin, relijion latin ha goude kristeniezh, kêrioù, hentoù h.a... An Impalaeriezh a gouezhas en he foull pa voe forzhet an harzoù gant ar strolladoù barbar deuet da laerezh ar pinvidigezhioù, da zistruj ar madoù, da lazhañ an dud, hag a-benn ar fin da aloubiñ takadoù-bro brasoc'h-bras betek ma varvas an Impalaeriezh da vat. An harzoù a zo buhez ar vro, hag evito da ober ar vevenn en-dro dezhi, ez int e gwirionez he lodenn greiz, ken pouezus ma 'z int. Gallout a rafemp menegiñ ivez moger-veur Sina. Savet e oa bet war-hed kilometroù ha kilometroù diniver, da virout ouzh ar Vongoled da aloubiñ ar vro sinat dre an Hanternoz. Treuzvuhez ar ouenn eo bet a-viskoazh an harz ! Den ne c'hall enebiñ ouzh kement a boell hag a ijinerezh. Seul vrasoc'h an oberenn, seul varzhusoc'h, seul vamusoc'h e vo. An dud e gwirionez a glemm, a nac'h, ha dreist pep tra a zispriz an izelegezh, rak an izelegezh ne zegas netra mat da zen, divalav eo, ha mezhus. Setu perak ne ya ket war-raok an emsav brezhon. Rak chom a ra da straniñ ha da gantren evel un dall e-barzh paludoù an izelegezh divenn. Ar Vretoned, ha reizh eo, a gav gwell ganto bezañ suj da Vro-C'hall he deus kinniget dezho ur vammvro, ur yezh unvan, un

identelezh kreñv hag un enor - goude bezañ bet distrujet an elfennoù brezhon avat - eget mont da heul un dornad hunvreurion vrezhon hep mennad na galloud eus an emsav... Ar strivoù bras embreget en XX<sup>vet</sup> kantved dindan lusk Roparz Hemon evit unaniñ ar yezh ne oant netra nemet ar c'hammedoù bihan kentañ war-du sevenadurezh nevez ha kreñv ar Vrezhoned dishual a chom deomp da c'hoveliañ ha da brofañ d'hor pobl. Ar yezh unvan, gounezet ha kelennet hiziv, hor c'haso war-raok. Drezi e rankomp bremañ kinnig ur sevenadurezh d'hor pobl, un tonkad, ur blanedenn geltiek modern. An harz a zeuimp a-benn da sevel un deiz etre Breizh ha peb all ar bed a vo unan eus kaerañ disoc'hoù hol labour. Lorc'h a vo ennomp evit an oberenn vrav hor bo tizhet seveniñ, hag ar Vretoned o-unan a zo enebet ouzhimp hiziv a sento ouzh ar galloud nevez, rak kreñvoc'h egeto e vo, hag int ha heuliañ al lusk evel ar re all, hag ober gantañ, ha kavout o flas er vro nevez ganet. An harz a zo hor pal, rak an harz, ur wech ma vo bet tizhet, ne vo netra nemet deroù hor buhez dishual ! Hon dor vrezhon ouzh ar bed !

### Tepod Mab Kerlevenez



*Plakennoù evit diskouez an harz etre Breizh ha Bro-C'hall staget gant ar strollad «Adsav» etre menez sant-Mikael-ar-Mor ha Machikoul er bloaz 2007.*

Arouezius e oa hepken, hogen un intrudu mat dezhañ peadra da lakaat ar bobl da ersaviñ ha da brederiañ. Tennet int bet abaoe, met petra 'virfe ez afemp da staliañ re all adarre ?

## An uhelwiaderion

Daoust d'an anv "Gwiader" bezañ unan douget alies a-walc'h dre ar vro, n'eus ket ken a wiaderion voutin e Breizh evel ma oa gwechall. An dilhadoù a wiskomp a vez graet e labouradegoù bras, peurliesañ, un tammig e pep lec'h er bed. Gant-se, penaos krediñ lakaat ar gaoz war an "uhelwiaderion"? Met petra eo un uhelwiader da gentañ ? E Bro-C'hall e chom daou c'hant anezho hag o micher a zo krouiñ pallennoù-moger evit ar stad c'hall, pezhioù bras anezho war donioù pompadus pe modernoc'h hervez ar gizioù, peadra da ginklañ diabarzh he falezioù ha savadurioù broadel. Setu petra eo labour an uhelwiader a zo anavezet e Bro-C'hall dindan an anv a "licier" pe "lissier". Hag ar ger "uhelwiader" e brezhoneg a zo un nevezc'her.

Evit adkavout uhelwiaderion e Breizh neuze e vefe ret deomp mont pell en-dro en amzerioù tremenet betek ar mare ma oa c'hoazh ur stad vrezhon ha tud a oa o micher kinklañ lez kastell-mañ-kastell. Marteze ho peus bet tro da arvestiñ ouzh pallen-moger brudet kastell an Duged e Naoned, an hini gant erminigoù ha bleunioù lili ? Savet gwechall gant uhelwiaderion vrezhon :



Ken buan all e c'hellfe hiziv an deiz bezañ kaset Brezhoned yaouank, ha brezhoneger evel-just, da Bariz, dezho da zeskiñ ar vicher hag ober e doare e teufent en-dro da Vreizh goude gant o skiant-prenet hag int ha sevel un embregerezh, ul labouradeg a wiaderezh pallennoù-moger evit Breizh hag ar Vrezhoned. Pezhioù awenet gant ur spered broadel brezhon e vefe, anat deoc'h, evit reiñ lañs en-dro d'ur c'hoant da welout Breizh-ar-vro ha neket mui Breizh ar rannvro c'hall a sell ouzh Pariz. Daoust ma vefe dav mont da Bariz evit deskiñ ar vicher... Met penaos ober a-hend-all ? Marteze ivez ne vefe ken aes ha se rak an danvez-uhelwiaderion kelennet dezho ar vicher gant tud labouradeg Pariz a rankfe sur a-walc'h chom da labourat

eno da c'houde, ne vefe ket un dra souezhus pa bad ar stummadur pevar bloaz memestra.



*Labouradeg ar C'hobelined, lec'hiet en XIIIvet rann gêr e Pariz.*

150 den a labour eno. (Un hanter-kant bennak all a zo e Bro-C'hall a labour o-unan). Hag ar 150 a dud-se a zo gopret neket hervez an niver a ballennoù fardet ganto met en un doare ingal pep miz, pe 1.500 € da bep hini, gant gwellentezioù ouzhpenn. N'eo ket aes-kenañ ar vicher. Pounner eo ar ruilhoù gwiad a vez ret sevel ha dilec'hiañ. Ivez, ezhomm a zo eus pasianted, kemer a ra amzer da wiadiñ ur pallenn, meur a vloaz a-wechoù evit ur pezh dek metrad da skouer. Labouret e vez gant an daouarn, azezet dirak ar stern a zo-eñ lakaet a-blom. An danvez labouret a c'hall bezañ gwiad pe gloan. Livioù a bep seurt a vez implijet ivez evel-just.

Da betra e c'hellfe servij kement-se e Breizh pa n'eus ket ken a stad vrezhon pe kastell da vezañ kinklet ? Da gentañ, kestall a zo c'hoazh forzh pegement er vro hag a vennfe hep mar ebet bezañ gwisket cheuc'h o diabarzh savet e mein yen. Soñjit 'ta pegen brav e vefe ur pallenn-moger a zek metrad hirded o tiskouez ar Roue Morvan war e varc'h, kelc'hiet gant e holl soudarded, e lanneier Bro-Wereg kozh o stourm ouzh ar Franked ! Hunvreal a c'hallomp, hunvreal a rankomp, ha dreist-holl lakaat an hunvre da wir war-lerc'h, evel-se hepken ez eer war-raok. Da eil, gwir eo n'eus ket a stad vrezhon da vezañ kinklet... evit c'hoazh, hogen salioù, tiez ha kestall a zo e Breizh, stad vrezhon pe ket, hag a rank bezañ perc'hennet gant ar Vrezhoned ha kinklet evel ma tere. Piv 'oar eus pe draoù a vo graet an dazont brezhon goude ? Hogen, dre ma n'eus ket a stad vrezhon evit goprañ al labourerion vrezhon a groufe hor "pallennoù-moger dreist awenet gant spered

Breizh dishual", penaos e vint paeet ? Ret e vefe tud a-walc'h dre ar bobl hag o dije c'hoant da brenañ anezho, ha tud pinvidik d'am soñj pa c'hellfe koustiñ ker-ruz ar pezh pallenn. Reoù a bep ment a vefe graet, anat eo, diaes eo krediñ e vefe dav d'al labourer labourat e-pad pevar bloaz evit sevel e oberenn dek metrad a hirded hep bezañ gopret e-pad ar pevar bloaz hir-se ! Reoù bihan a vefe graet neuze, peadra magañ war ar pemdez hon den kalonek. N'eo ket, n'eus forzh penaos, krouiñ pallennoù evit ur stad vrezhon hepken a vefe graet. Brav e vefe gallout krouiñ marteze un arz poblek ha keltiek diwar an oberennoù-se. Peadra da ginklañ tiez an dud, paour pe pinvidik. Savomp en holl ballennoù brav giz Persia a weler war ar marc'hadoù digor, pegoulz hor bo an hevelep re awenet gant giz Keltia ?

Ar pep diaesañ a vefe, hervezon, kavout un nebeut a Vrezhoned yaouank entanet gant ar soñj-se evit mont da labouradeg ar C'hobelined e Pariz da zeskiñ ar vicher. Nemet ha ma vefe ar pep diaesañ sevel ur gevrat<sup>20</sup> sklaer gant tud al labouradeg-se evit o lakaat da asantiñ ne vo ket evit o mad e vo kelennet ar vicher d'ar Vrezhoned yaouank, met evit mad Breizh. Rak interestoù Breizh, a zo ur rannvro eus ar Frañs, a

<sup>20</sup> Kevrat : *contrat*.

zo ur poent flemmus da skouarn ar C'hallaoued. Breizh a zo mat da zegemer an douristed, ha mat evit paeañ an droukkinnig ret pep bloaz da Vro-C'hall. Met Brezhoned o c'houlenn diganti e vefe pallennoù-moger e diabarzh savadurioù brezhon a-bouez, ha kement-se evit aweniñ ur c'hoant da welout Breizh Vroadel... penn fall a raio ar Gall. Ma n'eo ket c'hoarzhin ouzhimp. Ha ma ne vefe ket tu deomp lakaat Brezhoned da vezañ stummet e Pariz e vefe dav deomp a-benn neuze stummañ hon tud yaouank ni hon-unan, ur wezh ouzhpenn.

Krouiñ un embregerezh, prenañ gwiad ha gloan, resevout urzhioù-prenañ ha labourat evit se n'eo ket start. Ar vuhez vicherel ha netra ken. Ar pep diaesañ a zo, hag a vo atav, ar ouiziegezh. Penaos tapout ar ouiziegezh pa ra diouer deomp, ha pa vez dalc'het kuzh gant tud na youlont ket he darnaouiñ e priz ebet a-wechoù ? Ne servij da netra mont da glemm, pe tamall tra pe dra. Pa fell deomp kaout ar pezh a vennomp n'eus nemet daou hent da vont ganto. Pe goulenn skoazell digant tud hegaratoc'h eget tud all, pe kregiñ e-barzh an dra hon-unan ha deskiñ evel-se. "Ni hon-unan, ni hon-unan, war hentoù an dazont..."

## **Tepod Mab Kerlevenez**

### **Petra ober dirak an digravezekaerezh er bed kornogat**

#### ***Digravezekaerezh***<sup>21</sup>

Anat eo ez eo aet kalz war zigristenaat ar gevredigezh ha diaes e vefe sevel ur roll klok eus an holl lezennoù a ya a-enep ar goustiañs kristen. Ur Maer da skouer n'hell ket nac'h "dimeziñ" tud heñvel o rev. Al lezennoù-se a sav da bell en istor Frañs : likaerezh ar gevredigezh a sav da vihanañ d'an Dispac'h Gall, hag a-raok zoken (berzhidigezh urzh ar Jezusted...).

Setu, war an hevelep tro ma steuz e Breizh hor broadelezh a-gevret gant ar brezhoneg e-touez an dud, e steuz ivez ar gevredigezh kristen er bed kornogat (Amerika an Hanternoz ha Kornog-Europa). Er Stadoù-unanet ez eus bet meur a brosez a-enep tud na felle ket mont a-enep o c'houstiañs war o micher : ur bastezerez a nac'he fardañ ur wastell evit eured

<sup>21</sup> Digravezekaerezh : *sécularisation*.

heñvelrevourien da skouer. En anv ar wallziforc'hegezh enep-heñvelrevat eo e vez prosezet outo.

A-enep an Iliz war-eeun e vez stourmet ivez. E Frañs e fell da lezenourien 'zo sellout outi evel ul lobby, ha lakaet e vez eta a-rez gant an trustoù armerzhel. Nevez 'zo, Mary McAleese, bet prezidantez republik Iwerzhon etre 1997 ha 2011, a lavare ez a an Iliz a-enep Gwirioù Mab-Den, pa vadez bugale ez-vihan. En Aostralia ez eo bet mouezhiet ul lezenn a dorr sekred sakramant an Adunaniñ....

#### **Daou levr a-bouez**

Simon Noël, en e levr e galleg "*Deuet eo an eur*", a ziougan (da heul Jezuz, cf. Yann 17, 1-10) evit hor bed kornogat bet kristen ez eo digor a-benn bremañ marevezh an heskinerezh evit an dud a venn chom feal d'ar feiz kristen. Emañ an Iliz o vont da vevañ adarre un heskinadur, ur Basion. Seblantout a raio an Iliz bezañ kaset da netra hogen ur Pantekost nevez gourdrec'hus en em gavo neuze, bet diouganet gant



santez Marc'harid-Mari ha sekred Fatima. Diouganerez La Fraudais e Blaen (bro-Naoned) a lavar dres ar memes tra. Ober a ra an aozer meneg eus daou euzhvil an Diskuliadur, a laka da soñjal en Naziouriezh hag er Gomunouriezh, a oa enep-kristen o-div, hogen bremañ an daou euzhvil a zo kentoc'h an Islamouriezh arloupet hag ar Frankizelouriezh kornogat.

Klask a ra an aozer hon dibikouzañ, hon tennañ diouzh ar bleuperezh<sup>22</sup> : dindan stummoù all ez eo bepred an hevelep raktres diaoulek, da lavarout eo diskar an Iliz hag an talvoudoù denel henvoazel. Diwar lenn al lev-se e komprenet perak e klever er skinwel war-un-dro d'an hevelep deiz keloù eus ur gwalldaol islamek hag eus kaougantadur an euredoù heñvelrevat. Emaomp penn-da-benn gant an emgann etre mibien an aerouant ha re ar Vaouez.

### Ar c'hlaoustre beneadad

Rod Dreher, en e levr e saozneg nevez troet e galleg "*Ar c'hlaoustre beneadad – Ur bengadouriezh evit ar Gristenien en ur vroad post-kristen*"<sup>23</sup> a ginnig un hentenn evit dreist-bevañ en enkadenn-mañ ma vez heskinet an Iliz muioc'h-mui. Estrenvanet omp div wech eta. Ar Vrezhonegerien da zont, hag ar Gristenien da zont a ranko kemer disentezioù sonn ha pleustrek, evit derc'hel dirak gwalennoù an arnevezelezh. Da lavarout eo, evit ar c'hristen, penaos bevañ er feiz kristen en ur bed digravezelaet, deuet da vezañ enebet ouzh an Aviel zoken ? Ar re a gav dezho ez eo arvarusoc'h an islamekadur pe c'hoazh ar gleizelouriezh a zo faziet hervez Rod Dreher, da vihanañ er bed kornogat, hag e kendaolont da astenn droug an Digravezelaat hag an heskinadur a-enep ar Gristenien hag an Iliz dre ma ne verzont ket ar gudenn .

Ret eo deomp eta ijinañ un doare da vevañ kristen warc'hoazh vintin. Marteze ez eo re ziwezhat dija evit kalz ac'hanomp. Dizale e vo micherioù a vo (a zo ?) berzet ouzhimp : ar vezeien a rank asantiñ ober traoù a-enep d'ar feiz kristen, an apotikerien ivez, ar c'hlañvdiourezed ivez alies, ar gelennerien (er skolioù em-anvet kristen zoken) hag all hag all.

Rod Dreher a zielfenn mat en e levr penaos ez omp en em gavet gant ar saviad-mañ pazenn-ha-pazenn :

Kentañ pazenn : Er XIV-vet kantved, pa baouezed da grediñ el liamm didorrus etre Doue hag ar Grouadelezh (pergen gant levezon Gwilherm Ockham) ;

Eil pazenn : An "Adreizh" protestant er XVI-vet kantved, a ziskaras an aotrouniezh hag an unvaniezh er relijion ;

<sup>22</sup> Bleuperezh : *imbécilité, stupidité.*

<sup>23</sup> Le Pari bénédictin, une stratégie pour les Chrétiens dans un monde post-chrétien.

Trede pazenn : "Ar Sklerijennoù", evel-just, er XVII-vet kantved, a erlerc'hias ar Gristeniezh gant keheladur ar Rezon, a brevezaas ar vuhez speredel, hag a roas lañs d'ar marevezh demokratel ;

Pevare pazenn : Ar reverzhi c'hreantel, etre 1760 ha 1840, ha d'he heul ar gevalaouriezh en XIX-vet hag an XX-vet kantved ;

Pempvet pazenn : Ar reverzhi revel a ziwaskomp abaoe ar bloavezhioù 1960.

Kinnig a ra Rod Dreher mont da heul Sant Benead hag e reolenn. Sant Benead Nursia a oa ur brient e derou ar varbariezh, pa oa kouezhet en he foull an impalaeriezh roman, hag an Iliz a-unan ganti. Kuitaat a reas Roma da ren ur vuhez penitiour hag e tiazezas e gumuniezh kentañ. Krouiñ a reas ur seurt "*kevredigezh-eneb*", frammet mat gant ur reolenn-vuhez evit ar venec'h, ur reolenn a c'heller lakaat er pleustr ivez evit laiked hiziv an deiz. Ar mennozhioù pennañ a lakaan amañ berr-ha-berr :

- kaout urzh, retder ur reolenn, ar sentidigezh ;
- ar bedenn. Pediñ a laka Doue e kreizik-kreiz hor buhez ;
- al labour. Ha ma vez berzet ouzhimp ar postoù-labour er skolioù-meur, ober labourioù-dorn, evel artizaned pe e labouradegoù : evit seurt micherioù ne vezor ket o c'houlenn diganeoc'h ha kristen ez oc'h pe get ; lakaat ar gristenien all da labourat, zoken ma vez keroc'h ; sevel hor skolioù er-maez eus ar Stad ;
- Askezerezh. Dioueriñ evit lakaat Doue er penn-kentañ ;
- Stabilded. Chom hep dilojañ dizehan. Ar stabilded en ul lec'h resis a zo ur skoazell vras evit sevel ur rouedad a liammoù sokial evit stummañ ur wir gumuniezh ;
- Kumuniezh. An tiegezh n'eo ket tra-walc'h : ret eo sevel ur rouedad a diegezhioù hag a frammoù deomp hon-unan ;
- Degemerusted. En ur chom ar pezh ez omp, degemer an dud a vo hoalet gant aergelc'h evurus ar Gumuniezh ;
- Kempouez. N'eus ket anv da dreiñ da skarenn<sup>24</sup> na da droc'hañ a-grenn gant ar bed arnevez ;
- Lakaat Doue er renk kentañ e pep degouezh.

Kalz a skouerioù a ro Dreher en e levr, en o zouez hini Vaclav Havel, bet kadoriad Tchekia, a gemeras perzh en un emsav a led-kevredigezh dindan ren an URSS. Solidarismoc e Polonia ivez evel-just.

Diwar brederiañ war an Iliz e kinnig an aozer "*mennozhiaid ur gêriadenn gristen*" :

- ober eus e oaled ur manati bihan ;
- reiñ da gompren d'ar vugale ez eo diseurt o ziegezh ha tennañ lorc'h diouzh se ;
- teurel mat evezh o devo mignoned a zoare ;

<sup>24</sup> Skarenn : *secte.*

- karout e diegezh hag e gumuniezh, hep idolenniñ anezho ;  
- bevañ tost ouzh izili all e gumuniezh, kemer perzh e gwiad sokial an Iliz, skoulmañ darempredoù gant an Ilizoù all...

Ur pennad a-bezh a ginnig diwar-benn desavadurezh kristen ar vugale :

- kelenn dezho ar Skritur-Sakr ;  
- kelenn dezho istor ar sevenadur kornogat gant ar pemp poent a zo bet meneget uheloc'h ;  
- tennañ e vugale diouzh an Deskadurezh a-berzhstad ha chom hep bezañ touellet gant ar re emanvet kristen, dre-se sevel skolioù kristen gwirion pe ober skol er gêr, sevel oaledoù e metoù ar skolioù-meur...

Arnodoù “Emglev an Tiegezhioù”, “Minihi Levenez” ha “Tiegezh Santez Anna”, hep gouzout dezho marteze, a zo en em dennet un tamm eus ar bed hag o deus lakaet er pleustr lod eus erbedenoù

Rod Dreher. Hogen gwall vresk int dirak an enkadenn a vo gwashoc'h-gwashañ pa steuz ar yezh e-touez an dud en un Emsav frankizelour<sup>25</sup>. N'eo ket evit e blijadur en doa troet Maodez Glanndour “Reolenn Sant Benead” en hor yezh. En un atersadenn er gelaouenn “Breizh”, hag eñ oc'h ober e dalaroù, e lavaras e oa sur e tistrofe un deiz ar feiz e Breizh, hogen, gouez dezhañ, ne oa ket sur e vefe brezhonegerien war he ziriad. Gant ar c'hlaoustre doubl-se, hini ar feiz hag ar yezh e seblant gwall zu an dazont. Ha padal, petra eo ur yezh ma n'eo ket da gentañ benveg-kenhentiñ ur gumuniezh bennak 'zo ? Kristen pe get ? Ar Gristenien vrezhonegerien, inti o deus daou abeg da vont d'ar gouelec'h.

**Tepod Gwilhmod**

<sup>25</sup> Frankizelour : libertariste.

## Kastell kreñv Blaen

Tud Blaen e Bro Naoned, a zo lorc'h enno gant o c'hastell-kreñv bet savet e kreisteiz ar gêr, war c'hlann gleiz ar stêr Izar, un adstêr d'ar Winun. Bez' e oa parzh kevanek<sup>26</sup> eus difennoù harzoù Breizh gant kastell Gwitreg, Felger, Gwerc'h-Breizh, Kastell-Brient, Ankiniz, Ouldou, Klizun.

Kentañ tiern Blaen hennadet a voe **Gwegon**<sup>27</sup> (“*Guegonus de Blaigno*” e 1133 e Kartular Rödon f° 24, ha “*Guegono de Blaigno*” er f° 25) staliet gant Dug Breizh Alan IV Fergent, a reas sevel dezhañ ar c'hastell e 1104.

E 1225, Herve Iañ eus Blaen, diskennad eus Gwegon, a zimez gant Konstanz eus Pontkastell, intañvez da Wilherm Klizun, m'he deus bet digantañ ur mab, an danvez Oliver Iañ Klizun. E 1262 ez a hêrezh aotrouniezh Blaen gant Oliver Iañ Klizun, hogen displejout a ra da Yann II ar Rouz, Dug Breizh, a ra dismantrañ ar c'hastell. E vab Oliver II Klizun, diplomatoc'h eget e dad, en devoe an aotre digant an Dug da adsevel ar c'hastell ha brasaet e voe tamm ha tamm e-kerzh ar pevarzek kantved. Gant Oliver V Klizun, etre 1370 ha 1407 e voe brasaet c'hoazh ar c'hreñvlec'h betek dont da vezañ unan eus brasañ kreñvlec'hioù Breizh (nav tour en doa). E 1409 e timez merc'h Oliver V Klizun gant ar Beskont Alan VIII Roc'han. Evel-se e tremeno douaroù ha kastell Blaen e tiegezh ar Roc'haned betek an Dispac'h gall. E 1793 ez eo bet kenkizet ha preizhataet ar c'hastell. Devet eo bet an darn vrasañ eus an dielloù. Etretaluad ez eus bet drastadegoù brezelioù ar Relijionoù, dre ma oa bet kanttroet ar Roc'haned d'ar Brotestantiezh. Preizhet e voe kastell

<sup>26</sup> Parzh kevanek : *partie prenante*.

<sup>27</sup> Gwegon : *ur stumm kar da « Gwegen » ha « Gwegan » hiziv.*

Blaen gant an Dug Mercoeur, penn ar C'hevre katolik, ha war-lerc'h e voe dismantret a-nevez kastell Blaen war urzh ar c'hardinal Richelieu, d'an nebeutañ rezet an hanter eus an tourioù. E-pad an eil brezel-bed e voe ac'hubet tro-ha-tro gant ar Saozon, an Alamaned, an Amerikaned hag an FFI. Un istor trubuilhet eo bet istor kastell Blaen, evel hini kalz kastell all dre ma oa dreist-holl o roll pennañ difenn ar vro a oa dindan o gwarez. Hiziv eo bet treuzfurmet rann lojeiz ar c'hastell en ur predti, un ostalerezh, ha peurrest ar c'hastell a zo perc'hentiezh ar gumun ha staliet ennañ Mirdi ar Moullerezh, sez Pipe Band “Askoll ha Brug” eus Blaen, ha sez ar c'hevredad a ra war-dro adaozidigezh ar c'hastell a aoz ivez gouelioù e-barzh klozadur ar c'hastell evel ur gouel krennamzerel bep bloaz, ar “Breizh Tartan”, hag a-hed bloaz diskouezhadegoù livadurioù.

Ouzhpenn istor berr kastell Blaen, e felle din komz eus anv ar c'hastell. Gant tud ar vro e vez anvet kastell “*La Groulaie*”. Petra eo ar “Groulaie”-se. Kavet eo bet un displegadur gant ar re a ra war-dro an adaozañ. Dont a rafe diouzh “*groll*” anv ar vran e mitaweg, ul lec'h ennañ kalz eus al laboused-se a vefe ur “*grollaie*” oc'h emdreñ e “*groulaie*” gant an amzer. A c'hell bezañ, daoust ma ne gavan ket vez ket kavet kalz anvioù-stroll diwar anvioù-labous e romaneg, bez' e kavfed kentoc'h : “*Le champ des grolles*” pe “*Le pré aux pies*”... Bez' e c'hell bezañ neuze displegadurioù all.

E 2016 ez eo bet adkavet aspadennoù ur villa gallian-ha-roman war ar gumun anvet “*Langrolay-sur-la-Rance*” e galleg (22490), ha “*Langourlae*” e brezhoneg. Dre ranellder ez on aet da welout, war ar genroued, pennad-skrid ar gelaouenn a gomze eus an dra-se, hogen va evezh a voe sachet dreist-holl gant an anv “*Langrolay*”, rak rann “*grolay*” an anvlec'h

a oa tost heñvel ouzh “*Groulaie*” anv kastell Blaen. War al load *Wikipedia* e c’heller lenn a-zivout “*Langrolay*”: Le nom de la localité est attesté sous les formes *Parrochia de Langorlai* à la fin du XI<sup>e</sup> siècle, *Langorla* en 1165, *Langorlay* en 1227, *Langrollay* au XV<sup>e</sup> siècle et en 1513, ha displegadur an anv : “*Langrolay*” a zeu diouzh “*lan*” (peniti) ha “*Gourlae*”, anv ur sant brezhon. Bez’ e verzomp diouzhtu ez eo c’hoarvezet anadenn ar vetatezenn gant “*gour/gor*” o tont da vezañ “*grou/gro*”. Boaziet eo ar vetatezenn gant ar galloweg, n’eus nemet gwelout ar ger “*breton*” distaget “*bërton*” hag aze e-lec’h “*gourlay/gorlay*” hon eus “*groulay/grolay*”. En hevelep departamant Aodoù-an-Arvor ez eus “*Langourlay St Donan*” (22800) ha “*Langourla*” (22330) e-lec’h ma n’eo ket c’hoarvezet ar vetatezenn, heñvel gant kêriadenn “*St Gourlay*” er Groazig, Bro-Naoned, ha “*St Gourlay*” e Muzilheg, Bro-Wened. Evel-se e c’heller merkañ e c’hoarvez ar vetatezenn p’emaomp pell diouzh ar brezhonegva. Ar *Sant Gourlae*-se e Blaen a c’hellfe bezañ bet ur patron breuriezh<sup>28</sup> en derou-holl eus diazezadur ar Vrezhoneg er vro war-lerc’h trec’h Erispoe e 843 war ar c’hont frank Reynald e Blaen dres-a-walc’h. Sant Roch eo patron breuriezh ar C’hastell hiziv, gant e chapel bepred war-sav, met ur sant eus ar 15<sup>vet</sup> kantvet eo, neuze e tlee bezañ ur sant patron all a-raok, hag hemañ a oa sur-mat *St Gourlae*. An hanter eus breuriezhoù Blaen o deus anvioù brezhonek : *Bodebril*, *Boucahan*, *Bouguyou* (“bou” a zo un emdroadur eus “bod”), *Guény* (geunig), *Henleix*, *Magouer*, *Mespras* (maez + bras), *Millac* (eilstumm eus “Miliaw”), *Trelan*, ha da sent patron, sent brezhon evit un darn vras anezho evel : *Miliaw*, *Melar*, *Meven*, *Telo*, *Samzun*, *Efflamm*, *Rihowen*, *Gwilherm*... met lod anezho a zo bet amsavet gant sent c’hall, hag an dra-se a c’hell bezañ c’hoarvezet war-lerc’h feur-emglev 1532 pa-z eo bet staget dugelezh Vreizh ouzh rouantelezh Frañs, ha pa zeuas da vezañ kreñvoc’h al levezon c’hall war Breizh.

Mar deo bet *St Gourlae*, eus “*gour*” (rakger kreñvaat) + “*lae*” (feal) pe “*gour*” (den, gwaz) + “*lae*” (feal), neuze “den feal”, patron breuriezh, e

<sup>28</sup> Breuriezh : *isrannadur ar parrezioù e Breizh o tont eus reizhiad ar c’hlannoù evel c’hoazh e Bro-Skos hiziv, gant pep breuriezh e oa ur chapel, ur vered, hag ur sant gwarezour. E pep lec’h e Breizh e-lec’h eo bet komzet brezhoneg ez eus bet an aozadur-se. E Breizh uhel e oa anvet « frairie » an isrannadurioù-se.*

c’hell bezañ bet “*La Groulaie*” e penn-derou “*Langourlay/Langroulay*”, e-lec’h ar ger “*Lan*” a zo bet strishaet da “*La*” dindan levezon ar galleg, ha kemeret evit ar ger-mell strizh gallek “*la*” hag ez anavezan daou skouer da vihanañ eus an anadenn-se : “*La Harmoye*” (22320) ma oa e anv-orin “*Lanhermoet*” (peniti St Hermoet) ha “*Lariagat*” e Lopereg (29590) hag a oa en derou “*Lanriagat*” (peniti St Riagat). Neuze “*Langroulay*”, gwir anv “*La Groulaie*”, n’eo ket ur faltazi. Da notañ ivez ez eo *Blaen* un anv brezhonek, “*blein*” e gwirionez o vezañ ma-z eo lec’hiet ar bourk war un uhelenn evit an hini a zeu diouzh ar porzh war ar stêr Izar.

Ar ger-mell strizh gallek, el liester, “*les*” en deus ivez, meur a wech, kemeret plas ar ger brezhoneg “*lez*” (cour), da skouer e Gwenvenez-Penfaw ez eus parkeier anvet “*Les Groulâs*” war an hent a gas eus Gwenvenez da Rödon, hag a anavezan mat-tre evit bezañ labouret enno, a c’hellfe bezañ bet en derou “*Lezgourlae*”. An anvlec’h diwezhañ-mañ a c’hellfe ivez reiñ an alc’hwez evit meizañ ster ur gêriadenn all eus Blaen anvet “*Le Crolay*”. Da gentañ e tlefe bezañ “*Lezgrolay*”, met e brezhoneg “*zg*” pe “*sg*” a zeu alies da vezañ distaget “*sk*”, neuze “*Lezgrolay*” a zo deuet da vezañ distaget “*Leskrolay*” ha da ziwezh “*Le Crolay*” dindan levezon ar galleg. *St Gourlae* evel *St Efflamm* a zo sent eus Bro-Dreger, pe da vihanañ eus “*Dumnonia*” (Domnonea). Da geñver aloubadegoù an Normaned en deket kantved, eo bet drastet aodoù arvor Norzh Breizh, hag un darn vat eus annezidi an arvor-se a zo tec’het kuit war-zu ar c’hreisteiz, ha kavet repu e diabarzh ar vro, o kas ganto eñvor o sent, a roent da sant patron d’ar breuriezhoù a savent en o annezioù nevez. Ur brouenn eus an dra-se a zo, da skouer, ar ger mitawek “*treñchon*” (“oseille” e galleg), tostoc’h ouzh an tregerieg “*trechon*”, eget ouzh “*triñchin*” e kerneveg. Un diskoulm all c’hoazh a zo evit displegañ “*Le Crolay*”. Bez’ e c’hell bezañ bet en derou “*Lok Gourlay*”. En degouezh-mañ “*k + g*” a vez distaget “*k-k*”, neuze “*Lokkrolay*”. Ouzhpenn-se “*lok*” (diouzh al latin “*locus*”) a zo deuet da vezañ “*le*” e lec’hioù zo evel e “*Le Perguet*” e parrez Benoded pa oa da gentañ “*Loc Berguet*” (peniti Stez Berc’hed) pe “*Loc Maeldan*” e parrez Baod, Bro-Wened (peniti St Maeldan) deuet da vezañ “*Le Meldan*”. Da notañ ivez ar ger brezhonek “*lec’h*” o tont diwar al latin “*locus*” ivez, e-lec’h an “*o*” a zo deuet da vezañ “*e*”.

**Yann MIKAEL**

## Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

**War 1,3 miliard a dud e bro-Indez** ez eus un diouer a 63 milion a verc’hed, hervez ar stadegourien (mammenn : Figaro). Sioc’hanet e vez ar merc’hed a vil vern, setu aze perak. Ur wech bet ur paotr, hervez

ar stadegourien atav, e paouez kalz familhoù da c’hoantaat bugale.

**En Arc’hantina** n’eo ket bet degemeret an danvez-lezenn da aotren ar sioc’hanadurioù. Ouest-France,

hep prouenn sirius ebet, a ra anv eus 500.000 sioc'hanadur kuzh (evit ur boblañs a 44 milion a dud). Da c'hortoz, d'an deiz goude ar vouezhiadeg ez eo bet gwallet teir iliz, pergen delwennoù eus ar Werc'hez Vari livet e ruz, luganoù pro-choice... da c'hortoz e vefe mouezhiet adarre da aotren ar sioc'hanadurioù evel en Iwerzhon.

**Hervez ar c'hardinal Burke** ez eo gwriennet don an heñvelrevouriezh en Iliz e-touez ar gloer ha zoken en urzhaz an Iliz. Prokolor Pennsylvania a zo o paouez embann ez eus bet gwallet eno, etre 1920 ha 1990, war-dro 1000 bugel gant war-dro 300 beleg.

**Un tamm mat eus pennadurezhioù an Iliz** a zo gounezet d'an heñvelrevouriezh<sup>29</sup>. Daoust ma oa bet kastizet ar c'hardinal Mc Carrick, bet arc'heskob Washington, en amzer Benead XVI er bloaz 2000 o vezañ ma kouske gant kloareged, e seblant ez eo bet gwarezet daoust da se e-pad bloavezhioù gant ar Pab Frañsez e-unan, a anaveze doareoù Mc Carrick da vihanañ abaoe 2013. An hevelep kudenn a sav e bro-Chile hag en Honduras. Hervez an Ao. 'n eskob Vigano, bet noñs abostolek e Washington, ez eo emellet en heñvelrevouriezh-se en Iliz, doare pe zoare, lod o wareziñ ivez Mc Carrick, ar gardinaled Parolin, Leonardo Sandri, Fernando Filoni, Angelo Becciu, Giovanni Lajolo, Dominique Mamberti, Francesco Coccopalmerio, Bertone, Edwin Frederick O'Brien, Renato Raffaele Martino, Donald Wuerl, Kevin Farrell, Rodriguez Maradiaga, Sean O'Malley, Mahony, Cupich, Levada, Errazuriz, Ezzati ha ne venegan ket anvioù an eskibien a zo mesket evelto gant al lobby heñvelrevour en Iliz. Dilennet e vefe

<sup>29</sup> Heñvelrevouriezh : *homosexualisme*.

bet Frañsez da Bab gant sikour Mc Carrick, e vignoned hag e arc'hant, hervez McCarrick e-unan en "*National Catholic Reporter*". Kement-se-holl a ziskouez ez eus ur gwir rouedad heñvelrevour en urzhaz uhelañ an Iliz katolik.

**Kannaded eus LRM** a fell dezho aotren al labour da Sul dre-holl. Klaoustre ma vezo rediek goude un nebeut bloavezhioù dindan boan an dilabour.

**En ur ober seizh vloaz** eo bet pevargementet niver ar skolioù e-maez kevrat e Frañs (2017).

**An hanter eus 18 manac'h** abati Landevenneg a zo en tu all da bevar-ugent vloaz.

**Ur gejadenn ez eus bet** d'an 28 a viz Eost e Milano etre Viktor Orban ha Matteo Salvini evit komz eus kudenn loskus alouberezh Europa gant an dreuztiriaded afrikat hag o deus tamallet Macron da vezañ e penn ar re a c'houzalc'h an alouberezh-se. D'an 29 a viz Eost, e-kerzh e weladenn en Danmark en deus eilgeriet Macron, lorc'h ennañ : "*Ne godianin ket dirak ar vroadelourion, na dirak ar re a erbed an areizh-se a gasoni, neuze m'o deus gwelet em ferson o eneber pennañ, emañ ar gwir ganto*". Gouzavet ez omp bremañ : Macron ne raio netra evit ober d'an alouberezh afrikat-se paouez, hag evitañ ar re a glask herzel ouzh an alouberezh-se, a fell dezho difenn o bro, n'int nemet tud gasonius. Bez' e c'hello ar C'hallaoued neuze, dezastum war ar gomzoù-se en dilennadegoù da zont, evel ma krog an Alamaned da zibikouzañ o daoulagad war politikerezh noazus Angela Merkel e keñver enbroerezh, hag a zilenn kannaded eus an AfD (Alternative für Deutschland), strollad broadelour.

## Buhez hon Emglev

Deuet eo er-maez ur Bibl, kaer he stumm, embannet gant Penkermin e Pabu. He c'haout a c'heller evit 20 euro nemetken dre m'eo skoaziadet gant ar Rannvro. An Testamant kozh a zo testenn "An Tour-Tan" hag an Testamant Nevez, embannadur Al Liamm (Maodez

Glanndour). Siwazh avat, n'eo ket bet degemeret an testennoù dizembann troet diwar ar gresianeg gant skipailh Maodez Glanndour a oa bet kinniget ganeomp. O c'havout a c'heller diantao war lec'hienn EAT.

### Mererezh :

18 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ, pevar e 2018). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT pe Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

### Skridadozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr), pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X